

Done ra viro
Breiz !

Menlet ra vo
Jezuz-Krist !

Kenteliou SANT FRANSEZ A Asiz

Kelaouenn a gelennadurez kristen

TAOLENN AR MIZ

D'hol leunerien	49	Penaos e tremen Pi XI e amzer	57
S. Fransez hag al loe- ned	50	Lourd	59
Jezuz tentet	52	An cost a zo bras, mel	60
Gwelloc'h ar gann chom dall	53	Ar pemp Pub diweza hag an Drede-Urz .	62

REDACTION et ADMINISTRATION

P. Etienne CATHERINE, F.M. Capucin, 28, Avenue de la
Mame, LORIENT — C/c. : 215.15 Nantes — Priz : 8 lur.

*Pour tout changement d'adresse, prière d'envoyer 1 fr.
avec la bande du dernier numéro.*

Hon Aotrounez Eskibien a ro o bennoz

DA

“ **Genteliou Sant Fransez** ”
ha d'o lennerien.

« Eürus bras oan o welout moula « Kenteliou S. Fransez ». Benniga a ran a galon vat o skrivagnerien hag o lennerien kristen. »

An Aotrou DUPARC, eskob Kemper.

« Plijadur an eus o welout moula « Kenteliou S. Fransez ». Ita blijo gant Doue rei d'ezo brud bras hag e-leiz a lennerien. Pedit a ran Hor Salver Jezuz-Krist d'o benniga. »

An Aotrou SERHAND, eskob Sant-Brieg.

GANT AR BENNOZIOU-SE,

“ **Kenteliou Sant Fransez** ”
a yelo atao war wellaat

HAG

an niver eus o lennerien a yelo atao war greski.

Hep-dale e vint lennet

e kement ti kristen a zo e Breiz.

Ar re o deus c'hoant da gaout « **KENTELIOU SANT FRANSEZ** », a zo pedet da rei o hano d'an Tadou Misionerien po da skriva d'an Tad Eüenne CATHERINE, 28, avenue de la Marne, LORIENT, Morbihan. C.o. 215.15 Nantes.

PRIZ AR GELAOUENN EVIT EUR BLOAZ : 8 LUR



Kelaouenn a gelennadurez kristen

NIVERENN 40

D'HOL LENNERIEN

Lennerien ger,

« Kenteliou Sant Fransez » n'o deus c'hoaz nemet eun nebeudik bloaveziou, ha dija int skignet e kement parrez a zo en eskoptiou Kemper ha Sant-Brieg koulz lavaret. Trugarez ha mil bennoz a lavaromp a-greiz kalon d'ar re a skriv enno pennadoù ken dudius da lenn ! Trugarez ha mil bennoz ivez da gement hini, — ha pegen niverus n'int ket ! — o deus poaniet da skigna ar gelaouenn en-dro d'ezo.

Met n'eo ket a-walc'h c'hoaz, pell alese. M'o deus « Kenteliou Sant Fransez » kalc'h lennerien dija, e fell d'ezo kaout kalc'h muioc'h c'hoaz. Ma 'z int kaer da lenn, e fell d'ezo beza kaeroc'h c'hoaz. M'o deus breman ugent pajenn, e fell d'ezo kaout muioc'h c'hoaz ha mont atao war gresk. M'o deus graet vat d'an eneoù betek-hen, e fell d'ezo ober muioc'h c'hoaz... Ha setu perak e fell d'ezo-beza lennet...

e kement ti kristen a zo.

Rak Kenteliou sant Fransez eo kelaouenn ar familhou kristen.

Evit ar familhou kristen ez int skrivet... ha setu perak e vez kavet enno bep miz kement tra a c'hell ober vad ha plijadur d'eun tiegez kristen : kenteliou diwar-benn ar relijion, tennet dreist-holl eus an Aviel, kelc'ier eus buhez an Iliz hag eus ar misionou, kontadennoù kaer, kelennadurez diwar-benn Trede-Urz Sant Fransez, ken moulet gant ar Babed, skeudennou niverus... an niverusa ma c'hellomp.

Evit ar familhou kristen ez int skrivet... ha setu perak ne fell ket d'eomp e vefe kavet enno pennad-skrid ebet ha na vefe ket komprenet mat gant an holl.

Holl d'al labour, lennerien ger, evit kreski ha kaeraat alao muioc'h-mui « Kenteliou Sant Fransez ».

Ma resevit dija ar gelaouenn, kendalc'hit d'he reseo ha klaskit d'ezh lennerien nevez e-touez ho kerent hag hoc'h amezeien... An nob a glaska gao !

Ma n'he resevit ket c'hoaz, roit d'eomp ho hano hep dale muioc'h, hag e vo kaset d'eoc'h bep miz.

Holl eta d'al labour, ha ra vo lennet e kement ti kristen a zo « Kenteliou Sant Fransez », kelaouenn ar familhou kristen !

Priz ar gelaouenn evit eur bloaz : 8 lur

Rei an hano d'an Tadou Misionerien, pe skriva d'an Tad Etienne CATHERINE, 28, Avenue de la Marne, -LORIENT (Morbihan). C.c. 215.15 Nantes.



SANT FRANSEZ HAG AL LOENED

A-raok ar pec'hed ne oa ket a loened gouez, pe gentoc'h, al loened, gouez breman, a oa holl donv d'an amzer-se ha doujet d'an den. Met dre ar pec'hed e voe torret an urz kaer-se : o tissenti ouz Doue, hon tud kenta, evit o c'hastiz, a welas ivez al loened o tissenti outo hag o sevel enep d'ezo.

Eur santelez vras, eur e'horf hag eun ene dinamm, a ro eta d'an den galloud war ar grouadurien ha zoken war al loened gouesa. Setu perak o deus meur a Sant hag a Santez graet gant al loened e-giz ma karent. Sant Fransez dreist-holl a zo bet unan eus ar re-se. Nag a draou burzudus en e vuhez war ar poent-se ! Nag a zoujans dudius diskouezet d'ezan gant al loened !

Eun deiz, e-kichen Bevagna, e welas eun niver bras a laboused a bep ment hag a bep liou, hag e lavaras d'ezo : « Laboused, va Breudeur, selaouit komz Doue. Lec'h hoc'h eus da veuli ho Krouer; rak gwisket tomm ha brao oc'h bet gantan; roet en deus d'eoc'h diouaskell skanv da nijal en oabl seder, ha bemdez e ro d'eoc'h ho magadurez. » E-pad ma prezege ar Sant, e oa troet al laboused war-du ennan ; ar re a e'hlude war ar skourrou uhel, a stoue o fenn, evel evit e glevout gwelloc'h; ken bras e oa o flijadur, ma tigorent o diouaskell hag o beg ha ma sellent gant evez ouz ar prezeger, hep aon ebet razan, pa dremene en o zouez ha pa douche outo. Ne dejout kuit nemet goude beza resevet e vennoz.

Eun deiz all ma prezege Fransez e boure'hadenn Alviano, trouz ar gwennilied a vire ouz e gomzou da veza klevet gant an dud. Evit kaout ar peoc'h, ar Sant a lavaras d'al laboused-se : « Gwennilied, va C'hoarezed, pell-zo a-walc'h e klakennit aze. D'in-me eo breman da gomz. Selaouit 'ta va c'hentel, ha chomit sioul keit ha ma prezegin. » Raktal, evel p'o dije komprenet, e lavjont, hag e chomjont en o flas betek fin ar brezegenn.

Ar burzud-se a reas d'an dud selaou mat komzou sant Fransez ha beva muioc'h hervez Doue.



« Laboused, va Breudeur, lec'h hoc'h eus da veuli ho Krouer. »

Loen ebet n'helle chom hep douja d'ar Sant. Piou n'anavez ket istor bleiz Gubbio ? E kêr Karinola, Fransez a zônvaas ivez eul louarn hag en doa debret kalz yer diwar goust eur vaouez paour koz-koz. War urz Paourig Asiz, al louarn-se a vevas e Karinola da-c'houde, evel eur c'hi mat, hep ober droug da loen all ebet.

O na bras eo galloud an dud a vev dibec'h hag o deus en Aotrou Doue eur fizians divrall !



Jezuz tentet gant an diaoul

Jezuz, Doue ha den, en deus c'hoantaet rei d'eomp skouer e pep tra.

A-raok en em lakat da brezeg e Aviel, en em dennas en dezert da yuna ha d'ober pinijenn e-pad daou ugent dervez. An drouk-spered a gredas fostaat outan eno, hag a glaskas hen touella. « Ma 'z out Mab da Zoue, emezan, ro urz d'ar vein-se da drei e bara. » Jezuz a respontas d'ezan : « Skrivet eo : n'eo ket gant bara hepken e vev an den, met gant kement ger a gouez eus genou Doue. »



Jezuz tentet gant an diaoul e dezert Jeriko

Neuze e kasas an diaoul anezan da Jeruzalem, ha, goude beza e savet war c'horre an Templ, e lavaras d'ezan : « Ma 'z out Mab da Zoue, en em daol d'an traon, rak skrivel eo : gourc'hemennet en deus d'e aelez diwall ac'hannoul, hag e vezi douget ganto en o daouarn, gant aon na stokfe da dreid ouz ar vein. » Jezuz a respontas : « Skrivel eo ivez : ne denti ket an Aotrou da Zoue. »

An diaoul her c'hasas adarre war eur menez uhel, hag, o tiskouez d'ezan holl rouanteleziou ar bed hag o finvidigez, e lavaras d'ezan : « Me a roio d'it an holl draouse, ma stouez d'an douar evit va adori. » Neuze e lavaras

Jezuz d'ezan : « Kerz pell diouzin, Satan, skrivel eo : Adori a ri Doue da Aotrou ha ne serviji nemetan. » An diaoul e lezas neuze, hag an Aelez a dostaas evit e servija.

An den ivez n'en deus peoc'h ebet diouz an dentasion war an

douar-man. N'eo ket eur pec'hed beza tentet. Ha zoken an dentasion a ro tro d'eomp d'ober bemdez eur gounid bennak.

Bezomp war evez atao; beilhomp ha pedomp, hervez ma lavar d'eomp Jezuz, hor Mestr.

Er penn kenta e c'heller buan a-walc'h beza trec'h d'an dentasion ; met, pa vez lezet da greski er galon, eo tenn-meurbet harpa outi.

Harpomp eta dioustu ouz an enebour; prennomp outan dor hor c'halon ; magomp hor spered gant sonjezonou santel. Galvomp d'hor sikour Hor Salver Jezuz-Krist hag ar Were'hez Vari. Lavaromp d'ezo a-greiz kalon : « O Jezuz, ho pet truez ouzomp. Gwere'hez Vari, hor Mamm, hon diouallit ! »

Ha gant sikour gras Doue, evel Jezuz, ni a vo trec'h ivez d'an drouk-spered.

J. U.



« Gwelloc'h eo ganin chom dall ! »

Pebez anken e ti ar Meudeg, pa lavaras ar medisin ennan e oa kollet daoulagad an tad ! . . .

Daoulagad an tad ! An daoulagad a c'houneze bara gwreg ha bugale ! . . . An daoulagad a roe kement a lore'h d'ar gwyader seiz, a c'helle, hep o skuiza, tremen an deiz hag eul lodenn vat eus an noz daoubleget war e stern, o kas hag o ligas ar vulzun dre ar steuenn, evit ober eur wiad din da skedi e palez eur roue hag e goueliou an Aotrou Doue.

Hag eun dervez en doa ar Meudeg gwelet evel eur gelienenn o c'hournijal dirak e zaoulagad . . . E zourn a savas meur a wech d'he dic'haboucha . . . ar gelienenn a chomas . . . ar gelienenn a oa en e zaoulagad . . . hag ar Meudeg a wele anezi bepred, ha pa laboure war e stern, ha pa lenne e gazetenn. An enkreiz a grogas ennan, ennan hag en e wreg. Ma kouezfe dall !

Neuze, evit gouzout, en eur grenn, e oa klasket ar medisin.

**

Ha breman, p'en deus lavaret ar medisin eo kollet an daoulagad, p'ou a vago ar familh ?

Jozef, ar c'hosa eus ar vugale, n'en deus c'hoaz nemet unnek vloaz... Da betra eo mat ? Ken brao e tesk er SKOL GRISTEN, ma vefe pec'hed derc'hel anezan er gêr... Ar wreg a c'hellfe mont war zervez... Met petra 'c'hounezfe?... A-boan eur begad bara... Ha gouel-Mikael da baea !... Hag an dilhad da brena !...

An tad, ar paourkaez dall, n'eo mat nemet da astenn e zourñ d'an dremenidi... Met, ar Meudeg o vont da c'houlenn aluzen !... Ah ! nann, biken !

∴



Jozef, ar c'hosa eus ar vugale, n'en deus c'hoaz nemet unnek vloaz...

Ha koulskoude dont a reas eun dervez hag e voe ret debri meur a sonj. A-benn eun nebeud miziou e oa an dienez ar vrasa en ti-se gwechall ken laouen, teuzet ennan breman ar gweneien laket a-gostez d'an derveziou gounidigez, lavet c'hoarz ar vugatigou !

Hag, eun dervez, ar wreg, o vont d'he labour, a chomas da gonta kaoz gant eun amezegez :

« Penaos emañ du-se ?

— Atao ar memes tra...


— Met perak ne dit ket da gaout eur medisin hag a euz an daoulagad ?

— Mont a-walc'h a rafemp, ma vefemp pinvidik !.. Hag ar baourkaez maouez da ouela.

— Arabat eo d'eoc'h en em chala kement !... N'eus ket pell e kleven an aotrou Mer o lavarout : « Perak ne deont ket da gef ar beorien ? Arc'hant ar c'hef-se a vez votet evit klanvourien eveltan... Ennan e kavfent peadra da vont da Bariz hag ar Meudeg a vefe pareet.

— Gwir ?

— Pa lavaran d'eoc'h !



Ha setu hi war eun d'ar c'hef..

∴

E-lec'h mont d'he labour, gwreg an dall a zistroas d'an ti, ... mall ganti digas eun elfenn a esperans d'he fried :

« Kaout a c'hellez ar pare, emezi... War am eus klevet n'eus ket pell, n'hon eus nemet mont da gef ar beorien... Kement a wir hon eus warnan hag ar re-all... Da biou e rhaio muioc'h a vad eget d'ar micherour leal ha kalonek ma 'z out-te ?

— Selaou, emezan, biskoaz n'em eus goulennet netra... Kalet e kavan ar wech kenta...

— Lez ac'hanoun, emezi, d'en em emellout ouz pep tra; kredi a ran teuin a-benn eus va c'hefridi...

Ha setu hi war-eün d'ar c'hef... hag eno, goude beza beñ kaset da hen-hont da digaset da heman, e kavas erfin eun tamm brao o baotr lart hag a brizas kemer he hano, he leshano hag he goulenn, a-raok lavarout d'ezi dichek : « Deuit da gerc'hat ar respont a-benn eiz deiz.

*
**

E-pad ar sizun, ar Meudeg a reas meur a hunvre.

Daoulagad e gorf a oa maro, met gant lagad e ene, ar paour-kaez den a heulie e bried kalonek ha kristen en he c'hefridi, leun a fizians er c'helou a silvidigez a zigasfe d'ezan hep-dale.

O kaerat esperans !... Gwelout !... gwelout !... da lavarout eo distrei e-touez an dud, sellout ouz an heol hag ouz an holl draou kaer krouet gant Doue, lezel e zaoulagad da bara war e vugale, ha, dreist-holl, kemer en-dro e vicher, labourat adarre da c'hounit boued...

Emichans, n'eo ket eun hunvre goulo a rae... Daoust hag e c'houlenn ne dlee ket beza selaouet ?... Daoust ha nac'h a c'helled outan ar pezh a roed ken brokus d'ar re-all ?...

*
**

Klevout a ra e wreg o sevel an dereziou... o tont er gambr...

« Ac'hanta ?... Petra 'zo ?... »

— Feiz, emezi, nec'het, troet mat eo bet an enklask evidomp... Lavarout a ra ez omp labourerien leal, fur ha sioul... Met...

— Met, petra ?

— Jozef...

— Petra en deus graet ? Petra en deus graet ?

— Mont a ra d'ar skol gristen, hag Aotrou ar c'hef en deus lavaret d'in hor bije hor goulenn dioustu, gant ma kasfemp anezan d'ar skol laik.

— Ha ma ne fell ket d'comp ?

— Neuze n'hor bo netra. Gortoz a ra ar respont... »

An dall a chomas eur pennad da sonjal, e benn etre e zaouarn... Eun emgann spontus a oa en e ene... Gwelout a reas e vugel... e Jozef... ken karet... savet hep Doue... Sevel a reas e benn, ha gant eur vouez dichek :

« Kerz dioustu, emezan, da lavarout d'an den-se e kavan gwelloc'h chom dall !


Penaos e tremen Pi XI e amzer

Pi XI a sav abred diouz ar mintin hag a zigor e brenestr. Ober a ra e varo e-unan, daoust ma 'z eus unan karget d'ober e varo d'ezan. Neuze en em brepar ervat da lavarout an oferenn en e chapel. Beza aotreet da glevout an oferenn-se a zo eur c'hras ha na vez ket roet alies. Goude e oferenn, an Tad Santel a chom pell da bedi, da hir-sonjal e Doue.

Goude beza debret d'e lein bara hag amann gant eur banne kafe-laez, ar Pab a grog gant e labour. Reseo a ra da genta e sekretourien, ha, da 9 eur, ar C'hardinal Sekretour-Meur. Goude e vez digoret an nor d'an dud o devez c'hoant da welout anezan. Ar Gardinaled a zeu da genta, an eskibien ha mistri-vras an Urziou menec'h a vez digemeret war-lerc'h. Holl eskibien ar bed, milierou anezo, a dle, hep pemp bloaz, mont da welout ar Pab ha displega d'ezan stad an eneo en o eskopti. En eur erruout e Rom hag a-raok distrei d'ar gêr, e vezont digemeret gant an Tad Santel, ha souezet-bras e vezont o welout pegen mat e tale'h sonj eus traou hag eus tud pep eskopti

Da-c'houde e vez digemeret an dud a zeu a-strolladou. Ar Pab a dremen dre ar salioù e-lec'h ma vez bodet kristenien deut eus pevar c'horn ar bed. Pokat da walenn Vikel Jezuz-Krist a vez graet ha klevout digantan a-wechou eun nebeut gerioù.

Eun dervez e leuas eun nebeut kristenien eus eur gêr vihan da welout ar Pab. Pemp plac'hig gwisket e gwenn a ginnigas d'ezan a bep seurt traou. An hini vihana a oa ganti eur galotenn seiz. O kinnig ar galotenn d'ar Pab, ar plac'hig a zisplegas eun tammig



Pi XI, Pap

gwerz. Goulenn a rae ma teurvezfe ar Pab digemer ar galotenn-
se ha rei d'ezi an hini a oa gantan war e benn, evit kaout sonj
anezan. Pi XI a reas, en eur vouse'hoarzin, ar pezh a oa goulennet
digantan, hag ar-plac'hig a yeas kuit laouen-bras.

War-dro 2 eur goude kreisteiz, e vez echu gant ar Pab reseo
an dud. Neuze ez a da breja. E-unan e vez atao o tebri. Bemdez,
na pa rafe glao, e ra eun dro dre liorzou ar Vatikan. Ezomm en
deus, emezan, da gemer an aer ha da gerzout. Adalek e yaouankiz,
e plije d'ezan kalz pignat war ar menezioù uhel. Ar re a vez gan-
tan o vale — hag i yaouank koulskoude — o devez bec'h o heulia
anezan, ken buan e kerz.

A-wechou ez a e gwetur betek tachenn Itron-Varia-Lourd.
Eur c'heo, henvel ouz hini Lourd, a zo bet graet eno, hag an Tad
Santel, bet diou wech e Lourd (e 1893 hag e 1921), a blij d'ezan
stoui d'an daoulin ha pedi dirak skeudenn ar Werc'hez vat evit
holl ezommou an Iliz.

Graet gantan e bourmenadenn, ar Pab a gemer eur banne
kafe. A-hend-all ne gemer netra etre e brejou. Neuze e krog
adarre gant e labour, ha ne vez ket abred oc'h echui. N'ouzer
ket peur e c'hello debri e goan, rak n'ouzer ket peur e vo echu
e labour gantan. Da 8 eur, hag alies da 9 pe da 10 eur, ez a d'e
gambur da lavarout e chapeled. Goude-se e tebr e goan. E-pad
ma vez ouz taol, e c'houlenn digant e sekretourien displega d'ezan
nevezintioù an dervez ha lenn d'ezan pennadou eus ar c'hazeten-
nou.

War-dro 10 pe 11 eur, ez a d'e gambur e-unan, hag e sonj er-
vat er pezh a vez tremenet a-hed an deiz. A-raok mont da gousket,
e chom pell c'hoaz da bedi Doue.


Da 4 eur, bep gwener, e vez o kofes. E gofesour eo an Tad
Alisardi, eur Jezuist eus ar Piemont. E chapel ar Sakramant, en
iliz Sant-Per, e ra e gofesion. Pa vez echu, e stou e gofesour d'an
daoulin dirazan evit reseo e vennoz.

Pedomp alies evit Hon Tad Santel ar Pab evit ma teurvezo
Doue mirout anezan pell amzer c'hoaz e penn an Iliz, evit ma
teurvezo e venniga ha benniga gantan an holl gristenien a sent
ouz e vouez.

E. R.

« KENTELIOU SANT FRANSEZ » a zo eur gelaouenn a ge-
fennadurez kristen. He flas a zo eta e kement ti kristen a zo.

LOURD



ITRON-VARIA-LOURD

*Lourd, eur vourc'ig n'eus ket c'hoaz pell,
Dre-holl breman warni ar sell,
N'eus ket kaeroe'h kêr egeti,
'Vel eur steredenn o skedi.*

*Da betra nac'h, na mui kaout bam ?
E Lourd dreist-holl 'man ti hor Mamm ;
Eno neuze emamp er gêr :
Pelec'h ne vefe ket 'ta kaer ?*

*Rouanez ar Pireneou,
Choui eo balzam an eneoù ;
Ha ne vezit morse nec'het
'Vit rei d'ar c'horfou ar yec'hed.*

*E Lourd, Baradoz an Douar,
An dall, ar mut, hag ar bouzar,
Al lor, ar siet, an nammet,
Dre zourn o Mamm, 'vez dizammet.*

*E Lourd, dudi ha levenez
Saludi Gwerc'hez ar Menez.
Ar Feiz, eno, divrall ha krenn,
Ya sur, ken tost-all ouz an Nenn.*

P.J. GOUR-NA-GIL.

Menez Laouenan 15-1-1930.



An eost a zo bras, met...

Jezuz a oa eun dervez o prezeg an Aviel d'ar bobl. An dud a oa dirazan, — niverus e oant, — a oa henvel ouz denved hep-pastor; n'o doa den ebel d'o blenia. Hor Salver en doe truez outo hag a lavaras d'e ebestel : « An eost a zo bras, met an eosterien a zo nebeut anezo. Pedit eta an Aotrou evit ma kaso mederien d'e eost. »

Ma tremene Hor Salver en hon touez hirio, evel ma tremene gwechall e-touez ar Juzevien, e rofe d'eomp adarre sur-tre ar memes gourc'hemenn. Rak hirio ivez, sioutaz ! na bras eo an eost ha na rouez eo an eosterien ! Evit kelenn an niver bras a eneoù o deus kollet pe hanter-gollet o feiz en hor bro, n'eus mui beleien a-walc'h. Evit sklerijenna dreist-holl ar miliard a dud n'o deus ket c'hoaz klevel hano eus ar gwir Doue, n'eus ket ken-nebeut misionerien a-walc'h, pell alese. 1.000.000.000 a eneoù diwar 1.700.000.000 o veva dindan galloud an diaoul... 2000 vloaz goude maro Hor Salver !... Na spontus eo kement-se !... Hag evit sklerijenna kemend-all a eneoù, n'eus nemet 8.000 misioner beleg !

Pedomp an Aotrou Doue da gaout truez ouzomp ha da rei d'eomp beleien ha misionerien niverus ha santel.

Eur beleg muioc'h... eur misioner muioc'h..., ha setu e-pad 10, 20, 30, 40, 50 vloaz an Aviel prezeget hag eneoù sklerijennet.

Eur beleg muioc'h..., eur misioner muioc'h..., ha setu e-pad 10, 20, 30, 40, 50 vloaz ar sakramanchou roet hag eneoù santelaet.

Eur beleg muioc'h..., eur misioner muioc'h..., ha setu e-pad 10, 20, 30, 40, 50 vloaz an oferenn lavaret bemdez ha pedennoù niverus o sevel war-du an Aotrou Doue evit e adori, e drugarekaat, goulenn digantan sikour ha pardon evit ar bec'herien...

Eur beleg muioc'h..., eur misioner muioc'h..., ha setu e-pad 10, 20, 30, 40, 50 vloaz Hor Salver Jezuz-Krist anavezet ha karek gant eun niver bras a dud, an diaoul dilezet hag eneoù niverus saveteet.

Ya, goulennomp bemdez digant an Aotrou Doue rei d'eomp beleien ha misionerien, ha, dre hor pedennoù, hor pinijennoù, hon aluzennoù hag hor buhez santel, greomp atao kement a zo en hor



AN TAD DANIEL A SAMOZAT, misioner kapusin, paket gantan al lorgnez o louzaoui an dud lor ha taget e baourkaez korf, dreist-holl e zaoulagad, e wuzellou, e dreid hag e zaouarn, gant ar c'hlenved spontus. Breman' z eus eun nebeut bloaveziou, ez eas da Lourd da c'houlenn ar yec'hed, met, e-lec'h kaout ar pare, e klevas eur vouez o lavarout d'ezan: « Gouzantv c'hoaz gant pasianted; da-c'houde e vi eürus asamblez gannin. » Aet eo n'eus ket pell da reseo er baradoz ar gurunenn a oa bet prometet d'ezan gant ar Werchez.



E mision au Tadou Kapusined, ER RADJPUTANA (INDEZ), e kouez an dud alles er vrasa die-nez, ha bep taol e varv eun niver bras anezo. Ar visionerien a ra neuze... kement a zo en o galloud, evit reseo ar muia ar gwella eus an dud paour-se ha rei d'ezo boued da zebri. Setu aman daou, eun tad hag e vab, hag a oa hanter-varo gant an naon, pa errujont e ti an Tadou. O-daou int deut da veza kristenien abaoe.

galloud evit o sikour da sklerijenna an eneoù, d'o santelaat ha d'o c'has d'ar baradoz.

Ma rafe an holl gristenien o dever war ar poent-se, nag a vad a vefe graet ! Nag a eneoù a vefe saveteet !



Ar Vatikan, e-lec'h m'eman Hon Tad Santel ar Pab o chom.

Ar pemp Pab diweza hag an Drede-Urz

« Ne fell ket d'in e vefe den kollet. » Setu aze unan eus ar c'homzou ar muia karantezus en defe lavaret Hor Salver Jezuz-Krist. Sant Fransez a Asiz, e servijer bras, en deus lavaret d'e dro : « Me am eus c'hoant da gas an-holl d'ar baradoz. » Hag e gwi-rionez, n'eus ket kalz a sent hag o defe labourer kement hag he da savetei an eneo.

Evit ar wazed hag ar merc'hed a fell d'ezo kuitaat ar bed evit kerzout strisoc'h war roudou ar Mestr, en deus savet diou Urz a zo hirio c'hoaz, goude 700 vloaz, ken beo ha biskoaz.

Evit ar gristenien a rank chom da veva e-kreiz ar bed, en deus savet eun Urz all, an Drede-Urz, evit o sikour d'en em santelaat hep kuitaat na ti, na kerent, na madou.

Pell diouzin ar sonj da izelaat pe da zisteraat ar breuriezou niverus a gaver hirio er parrezioù, met, ret eo hen diskleria, n'eus hini ebet anezo hag he defe roel d'an Iliz kement a Sent hag a Sentezed ha Trede-Urz Sant Fransez ; n'eus hini ebet hag a vefe kavet enni kement a c'hrasou ; ha setu perak n'eus hini ebet anezo kennebeut hag a vefe bet ken meulet gant ar Babed.

Abaoe seiz kant vloaz m'eo savet an Drede-Urz, o deus ar Babed skrivet war-dro 200 lizer da alia ar gristenien, ha dreist-holl ar re yaouank, da rei d'ezi o hano, ha 16 anezo, en o zouez ar 5 diweza, o deus o-unan heuliet he Reolenn.

Nag a gomzou kaer a zo kouezet diwar o muzellou evit meuli ar Reolenn-se ! Setu aman lod anezo, bet lavaret gant ar pemp Pab diweza :

« Servijer kalonek da sant Fransez, nag eürus oun ouz e

welout muioc'h-mui anavezet ! Kredi a ran n'eus ket gwelloc'h louzou evit parea an droug a welomp en hon amzer-ni eget e skoueriou hag e gelennadurez. » (Pi IX d'an Aotrou n' Eskob a Segur, 10 Gwengolo 1877).

« Ar c'haera eus ar Sent eo sant Fransez. » (Leon XIII, 11 Mae 1886).



PI IX



Leon XIII

« N'heller ket ober d'in brasoc'h plijadur eget rei da anaout Trede-Urz sant Fransez. » (Leon XIII, 28 Here 1882).

« Lavarit e pep lec'h e fell d'in sevel ar Frans a-nevez dre an Drede-Urz. » (Leon XIII, Mae 1886).



PI X



Bened XV

« Labourit gant nerz-kalon da sevel Breuriezou eus an Drede-Urz; he Reolenn a dle rei eur vuhez nevez d'ar bed. » (Leon XIII, 5 Here 1891).

« An Drede-Urz ! Nag a vad ho hijs graet d'ar Frans, ma vije bet selouet ar Pab Leon XIII. » (Pi X, Genver 1908).

« Goulenn a reomp ma vo graet prezegennoù en ilizoù hag er chapelioù evit kelenn an dud war an Drede-Urz.

« Ha pa n'en defe Sant Fransez savet nemet an Drede-Urz, e vefe ret c'hoaz e lakat e-touez ar re o deus ar muia labouret evit an Iliz. . . Grit ar pezh a zo en ho kalloud evit tenna e-leiz a dud en Urz-se. » (Pi X, 25 Ebrel 1909).

« An Drede-Urz he deus eun dalvoudegezh vras evit sante-laat an dud, harpet ma 'z eo war an Aviel. » (Benead XV, 6 Genver 1921).

« Breman e kaver e pep lec'h breuriezou niverus a dud yaouank, a verc'hed, a vicherourien. Perak ne rofent ket holl o hano d'an Drede-Urz ? An Urz-man a ra kristenien santel eus an dud a rank beva e-kreiz ar bed. » (Benead XV, 6 Genver 1921).

« Ma n'hoc'h eus ket roet c'hoaz ho hano d'an Drede-Urz, roit-hen d'ezhi hep dale muioc'h. » (Pi XI, 1926).

« Kredi a reomp n'eus bet sant all ebet henvelloc'h ouz Hor Salver Jezuz-Krist eget sant Fransez.

« Leon XIII ha Benead XV a lavare sevel e pep lec'h Breuriezou eus an Drede-Urz; me a c'houlenn diganeoc'h ar memes tra. » (Lizer-Meur Pi XI, 30 Ebrel 1926).

Setu aze ar pezh a lavar d'eomp, ar re a zalc'h war an douar-man plas Hor Salver Jezuz-Krist hag o deus bet digantan ar galloud hag ar garg d'hor bleina war hent ar baradoz. Na chomomp ket eta da vare'hata. Sentomp outo war an taol, ha roomp hon hano d'an Drede-Urz; enni eman ar silvidigezh evit hon eneoù !

« KENTELIOU SANT IFRANSEZ » eo kelaouenn ar familhoù kristen. Ma resevit anezhi dija, klaskit d'ezhi lennerien nevez-e-touez ho kerent hag hoc'h amezeien. Ma n'he resevit ket c'hoaz, roit ho ano D'AN TADOU MISIONERIEEN ar c'henta 'r gwella, pe skrivit d'an Tad ETIENNE CATHERINE, 28, AVENUE DE LA MARNE, LORIENT (Morbihan), C.c. 215.15. Nantes, hag e vo kaset d'ec'h bep miz.

Priz evit eur bloaz : 8 LUR

Tadou ha mammou kristen

n'hon ankounac'hait ket !!

« Kentelioù sant Fransez »

a zo skrivet

evidoc'h hag evit ho pugale

Roit eta ho hano d'an Tadou misionerien

Skrivit d'an Tad Etienne Catherine

28, Avenue de la Marne

Lorient, Morbihan. — C. C. 215-15 Nantes

HAG

e vo kaset d'ec'h ar gelaouenn

bep miz

Priz ar gelaouenn evit eur bloaz : 8 lur.

“ Kenteliou sant Fransez ”

EO

kelaouenn ar familhou kristen

**He fennadou-skrid a vez atao
dudius da lenn**

**Ne vez netra enni ha na vez ket
komprenet gant an holl**

HA

**Setu perak he deus atao muioc'h-mui
a lennerien**

LENNIT HOLL :

“ Kenteliou sant Fransez ”

Kelaouenn ar familhou kristen

Priz evit eur bloaz : 8 lur.